



2023 – Sizhun 1

## Programm Istor hag Istor al Lennegezh

Lun	Meurzh	Merc'her	Yaou	Gwener
Breizh a-raok an Xlvet kantved	Ivonet Omnes: pezh barzhoniezh kozhañ e Brezhoneg	Etre pinvidigezh ha pellaat diouzh preder Pariz (1514-1789)	Diskar ar Brezhoneg Krenn, diskar ar gwerzaouiñ hengounel	Breizh a-dal meur a hent (1914-2022)
Ehan 10:30e				
Taliesin ha roudoù kozhañ al lennegezh Predennek	War hent ur Stad (1341-1514)	Lennegezh ar misterioù	Breizh berzet (1789-1914)	Atelier skrivañ / kanañ gwerzennoù enklotennet
Pred				
Dindan beli roue Bro-C'hall (1202-1341)	Diorren ar reolennoù gwerzaouiñ a zaou du mor Breizh	Brezhonegerien ar vro	Roudoù ha davet un azginivelezh romantel?	Labourat diwar dielloù + prientiñ un abadenn ?
Ehan 3:30e				
Ar varzhoniezh Predennek a-raok an Xlvet kantved	War hent ur Stad (1341-1514) + Labourat diwar dielloù	Brezhonegerien ar vro	Breizh berzet (1789-1914) + Labourat diwar dielloù	Atelier skrivañ / kanañ gwerzennoù enklotennet

## Istor Breizh

-> **Pal** : ober anaoudegezh gant istor Breizh, studial peseurt darempredoù he doa gant Rouantelezh Frañs betek ar XVIvet kantved, studial penaos e oa bet ebarzhet e Frañs ha peseurt hent o doa kavet ar Vretoned eno.

Ur sell hollek war istor Breizh adalek an XIIIvet kantved a vezo kinniget amañ. Ar brasañ eus ar c'hentelioù a vezo kaset dre ur brezegenn - degemeret a galon vat e vezo ar goulennoù avat - tra ma vezo kinniget prantadoù labour war dielloù ha mareoù en em soñjal war ar mod da welet an darvoudoù ha da studial an istor.

N'eo ket ret bezañ graet studioù war an istor evit heuliañ ar rummad kentelioù-se.

---

## Istor al Lennegezh

-> **Pal** : ober anaoudegezh gant pezh dibarañ al lennegezh vrezhonek, da lavaret eo ar varzhoniezh enklotennet, kompren he liammoù gant ar c'henganezioù kembraeg, hag an diforc'hioù etrezo.

Ouzhpenn studial ar varzhoniezh, e vo lakaet ar stajidi da sevel pezhioù barzhoneg vihan. Kinniget e vo dezho an ostilhioù modern a c'haller ober hom mat eus outo evit hen ober.

Ezhomm ebet bezañ ur mailh war ar brezhoneg nag ar c'hembraeg evit heuliañ ar gentel-mañ.